

KIS-391 – Et. : k/cinemat-, k/cinet-.

(GE – 16 04 91)

An holl luniadoù Et. pe dost diwar hGr. kinevw, kinhtov~, kinhtikov~, kivnhma, kinhvματο~ zo bet kendec'heriet e Br. dre zeveradoù diwar **-fiñv-** :

fiñvoniezh "cinématique" (VALL. 123) ; "mécanique" (VALL. 456, NDBF. 283, GIBR². 834.)

fiñvskeudennerezh "cinématographe" (VALL., 123).

fiñvventerezh "bilan cinésiologique" (ARDN., passim).

bevfiñvour "kinésithérapeute" (ARDN. 1, 3).

bevfiñvouriezh "kinésithérapie" (ARDN. 1, 3, 45).

gremm fiñvek "énergie cinétique" (KIS-110, La-06, 46, 52, 53).

anfiñvel "akinétique" (KIS-318, La-08, 251, 254).

arzdefiñval "arthrocinèse, arthrokinèse" (GEVE.ms.)

ankedre diafiñvel "ataxie cinétique" (GEVE.ms.)

fiñvskinluniñ "radiocinématographie" (GEVE.ms.)

gwazhiedfiñvluniñ "ciné-angiographie" (GEVE.ms.)

bevfiñv "cinèse" (GEVE.ms.)

bevfiñvekaat "cinématisation" (GEVE.ms.)

bevfiñvoniezh "cinésiologie" (GEVE.ms.)

Gwelout a reer ne vez graet, e sigur an teskad termenoù-se, kemm ster ebet etre ar c'hedrannoù Et. **cines-** (**kines-**), **cinet-**, **cinemat-** (**kinemat-**), **cine-** (**kine-**).

Koulskoude, en un dachenn eus ar Fizik arnevez da nebeutañ, e verker un diforc'h etre Et. **cinemat-** ha **cinet-**, ent dibarek etre Gl. **cinématique** ha **cinétique**.

Evel a ouzer, ez eus d'al **loc'honiezh** (Gl. **mécanique**) skourroù a anver **savoniezh** (Gl. **statique**), **nerzhoniezh** (Gl. **dynamique**), **fiñvoniezh** (Gl. **cinématique**), sl. Da-63, 57. Hervez ar mellad meneget, e c'haller despizañ pep hini eus an diskiblezhioù-se evel henn :

LOC'HONIEZH b., studi al loc'hañ gant ar c'horfoù dindan wered an nerzhoù.
SAVONIEZH b., studi ar c'hempouez etre an trevnadoù nerzhoù pe, eeunoc'h, etre ar c'horfoù a-sav.
NERZHONIEZH b., studi ar c'heñver etre al loc'hañ hag an nerzhoù.
FIÑVONIEZH b., studi ar c'heñver etre al loc'hañ hag an amzer.

Hogen, e-kichen ar fiñvoniezh, en astenn dezhi kentoc'h hag o taveiñ da bennaennoù ar savoniezh hag an nerzhoniezh, ez eus bet diorreet un diskiblezh nevez, anvet e Gl. **cinétique**. Endra laka ar fiñvoniezh e penn kont ar regadoù (L) hag ar padoù (T), o reiñ dre se an tu da studiañ loc'hadoù ur sonnenn anargemm, ez ebarzh ar **cinétique** un trede mentad a zo an tolzoù (M) hag e c'hell e se ober seiz war an trevnadoù korfoù war gemm, evel un aezhenn, ul liñvenn, un teskad sonnennoù. Kemer a ra da vonlakadenn e revez e pep poent M eus un egor euklidel gouzalc'het gant un teskad danvezel un douester tolz skeuliat $\rho(M)$. Da skouer, mar studier un aezhenn, ne bleder mui gant loc'hadoù ur c'horf andistummadus, sonnel, met gant lavig an eufl a ya d'ober ar c'horf aezhel – hag en en greer diwar-bouez un dezrann stadergel hag ur riñvoniezh disheñvel diouzh an hini arveret gant ar fiñvoniezh.

Da bourchas ar c'hevatal Br. d'ar Gl. **cinétique** er ster meneget diaraok, e kinnigan deverañ diwar **korzh-** (< hBr. (*do*)*cord(om)*) "Le radical *cord-* de *docordom* rappelle le gallois *corddi* qui ne signifie plus que "baratter", du sens ancien de "faire mouvoir, agiter". DGVB, 262, Kb. "*corddaf*: *corddi* [? o'r gwr. *(s)*qer-* "neidio, llamu" ag a welir yn *cerddaf*: *cerdded*, H.Wydd. *focerdaim* "taflaf, bwriaf", Llad. *cardo* "corddyn, colyn"]" GPC, 557).

Evel a ouzer, ez eus bet luniet c'hoazh un niver termennoù diwar ar gedrann-se :

korzher, korzhour "agitateur (révolutionnaire)" (*Emsav* 18, 182, 1968).

korzherezh, korzhouriezh "agitation (révolutionnaire)" (*Emsav* 28, 123, 1969).

degorzhañ "excréter" (GEVE.ms.)

gougorzhañ "solliciter" (KIS-382,).

Stadañ a reer un derez a gevazaster etre durc'hadur steriegezh ar gedrann hBr. *cord-* hag ar c'heal a glaskomp dec'heriañ amañ. Arguzenn lañsus all : n'eo ket bet arveret c'hoazh ar gedrann **korzh-** er Fizik hag ouzhpenn se n'eus arvar a vesk sonel etrezi ha kedrann all ebet. En ur ptantad kentañ, e'm boa soñjet e **luz-** (< hBr. *lus(on)*) a'm eus dilezet pa gaver endeo e yezh ar Fizik deveradoù diwar Br. *luz(iañ)* : **luzded** (sl. KIS-110, La-06, 47, 50, 54).

A se e kinnigan al luniadoù-mañ :

Br. **korzh** b. "teskad ar fiñvoù en un drevnad korfoù war gemm", Gl. **mouvement (d'un ensemble matériel)**.

Br. **mentel** b. **gorzh** "stad un trevnad fizikel-kimiek ma vez erlec'hiet ennañ e pep ampoent molekul nevez ouzh ar molekul dilec'hiet pe distrujet, e doare ma chom arstalek an niver anezho dre unanenn ec'honad", Gl. **équilibre cinétique**.

Br. **korzhoniezh** b. **an aezhennoù, arlakadenn gorzhoniell an aezhennoù** "diskiblezh o plediñ gant perzhioù an aezhennoù, diazezet war zezrann stadegel korzh ar molekul (al lavig hag ar c'henstokoù etrezo e kement m'o seller evel poentoù danvezel", Gl. **théorie cinétique des gaz**.

Br. **korzhoniezh ul lia, liagorzhoniezh** "studi korzh ul lia er bevedeg, eleze, e pep ampoent, an dasparzh hag an dilec'hiadur anezhañ dewerzhed e-keñver tolz ha fiñv", Gl. **pharmacocinétique** (sl. KIS-390, p.).

Br. **korzhoniezh ar gellig** "termen leterc'hadek oc'h envel studi dibun ha padelezh lankadoù nergor ar gellig, amkan ar studi o vezañ amprouiñ gwered an aozadoù enepkankrek", Gl. **cinétique cellulaire**.

GERVA BREZHONEK-GALLEK.

N'eus meneget amañ nemet termenoù roet hep o c'hevatal Gl. en destenn.

aezhel aa. gazeux (sl. Da-64, 10).

aezhenn b. gaz (sl. Da-64, 10).

anargemm aa. invariable.

arstalek aa. constant (sl. GBLF, ¶ 239).

bonlakadenn b. postulat (sl. *Emsav* 34, 329).

dezrann g. **stadegel** analyse statistique.

douester g. densité (sl. Da-63, 35).

ec'honad g. volume (grandeur) (sl. Da-63, 37, 38).

egor g. espace (sl. Da-63, 37 ; KIS-323, La-08, pp. 270 hh.).

enepkankrek aa. : **aozad** – produit anticancéreux.

euklidel aa. euclidien.

lankad g. phase.

mentad b. grandeur (sl. Da-63, 59 ; KIS-324, La-08, pp. 274 hh.)

nergor g. cycle de multiplication, cycle de division.

revout, aao. : **revezet** exister (sl. *Emsav* 124, 17).

riñvoniezh b. mathématique.

skeuliat aa. scalaire (sl. SADED, Jon 10, 3).

sonnel aa. solide.

sonnenn b. solide.

teskad g. ensemble (sl. *Gerva Prd*, 335).

tolz g. masse (sl. Da-63, 82 ; KIS-110, La-06, 47, 54).

trevnad g. ensemble, système (sl. KIS-333, La-08, pp. 309, 310 ; GSTL, ¶ 1265, 1492, 4068 □).